

ANN DERO

BARZONEK

114

War don : *Klevomp, koz ha iaouank.*

I

Kanomp holl ann dero, roue ar c'hoajou bras ?
Kanomp holl, tud iaouank, ha ganomp ar gwe glas !
Kriz eo ann hini a drouc'h ann dervennd ;
Allas ! Kement a gwe e Breiz zo diskarret !

II

Ar gwe a zo santel ! Ar Gorriked, bemnoz,
A zeu da gorolli war dro ann dero koz ;
Hag ann Anaoun kez, da sklerder al loar,
A skuill eno daëlou, daëlou war ann douar.

III

Gant he zeliou stank braz eun dero kant blossiad
Ha gant he vleo hir war he c'houg eur Breiziad
A zo evel daou vreur ; daou vreur, hep laret gaou
Leun a nerz, a vuhe, kren ha kaled ho daou.

IV

Gueled em euz, e Scaer, eun dero ken huel
A zave enn evou he vek dreist ann avel ;
Eur gourenner ive ken stard em euz kavet,
En doa oc'h ann douar he dreid kasi staget.

V

Ma ve gand ar gurun d'ann douar diskarret,
Eul lestr gant he gorf don, eul lestr braz a vo gret :
Labourit 'ta, kalve ! ha deuit, tud-a-vor !
Roue ar menesiou zo c'hoas roue ar mor.

VI

C'houi ive, mesiaded, deuit ! ha gant peb bar
Grit peuliu ha freillou, gand ar c'hef eun alar !
Mes savomp da genta e cornic ann hentchou
Lamm-groaz war pehini oe staget Hon-Aotrou.

VII

Tal va bez, tud iaouank, c'houi lakai eun derven,
Hag ann eostic klemmuz a gano var he fen ;
« *Brizeuk, barz bleo melen, aman a zo besiet ;*
Hennez a gwir galon gare ar Vretoned. »

Auguste BRIZEUX.